

130

Chanson

(59, suite)

Var sujet daou zep yaouanc dispartiet gant o zud etre an demerji
hac an eured.

Var ton

Tavit, calonou sansibl, selaout gant silanç
Ar recit eus va glac'har, trista experianç!
Ar fortun en e c'holer, diouz hent an eürustet,
Dre goal mouvamant e rod e deus bet va stringet.

Tav eta, va c'halonic, izella da glémon;
Ro liberte d'am speret da zespeign va foannion;
C'houi ive, va daoulagad, bremän n'em disec'het,
Va quenou na ell qet comz re e c'heus en trempet,
C'houi, va oll facultéou a voderation,
Vit ma ellin quiell prononç va güir affliction.

(60)

M'em boa choazet gant respet evit va c'harante
Eur grouadurez yaouanc voa deus va c'hontre.
Bea'meus bet eviti eur garante barfet,
Ha deus e feurs e-unan ön bet pell enoret.

O amzer a blijadur, te a zo tremenet!
Consolation, esperanç, evidomp oc'h collet!...
Oh! na trista chenchamant a eprouän brêmä!
Courach, courach, calon baour, pe e yès da ranna.

Kenet hor boa hofu] yaouançis gant enor ha prudanç,
Hon daou fidel d'ar vertus, bevet en innocanç,
Hac evit sönjal rentä parfeto'h hor boneur,
Hon eus troublet hon repos, fabriqet hor maleur.

Hon diou galonic a voa a bell zo unanet,
Hac hon daouarn prest goude beza prest erret
Anfiñ, d'en em quemeret voamp carzi dija prest,
Pa goljomp, evel Adam, ar barados terrestr.

(61) N'hor boamp get bet vit certen eveltan tanveet
 Diouz ar vezen a vue, eus ar frouez difennet;
 Mes santimanchou barbar demeure va oll guerent
 A eure dre va sempldet din quittat prest va hent,
 Hac elec'h bea unanet d'am güir bried Eva,
 Voen diouti separet, casset d'ar vro bella.

M'ho lez, sperejou parfet, bremä oll da gompren
 Evidon pey tol curun, pebes goal blaneden!
 Separi diou galonic na rent nemet unan,
 Ha donet d'o difframma! onnes a voe eur boan!..

Onnes e zzo gouscoude ar supplig hac ar groas
 A supportas va c'halon na pa zispartias
 Diouz calonic innoçant va douç ha va fried,
 Dirac Doue hac ar bed, an hini 'm boa choaret.

Entrezo'h-hu, tud yaouanc, oc'h eus intention
 Da zont da formi 'r chaden gant güir reflexion,
 Gent equet n'em angagi, goulennit ouz Doue
 Mea plijo ar choas ho po grêt d'ho tud ha d'ho ligne.

(62) Pe autramant, mignonet, affec'h eun deiz caret
 Glac'har vras hac ive geus ho pe varnoc'h tennet;
 Mes pedit Doue bepret: ennes ar güir voyen
 Da bellat ourzo'h goal chang hac ar goal blaneden.

Ne gredfo'h get, marteze, pens va foan gentä
 Ne deo nemed eur squeuden tost d'am foan a bremä.
 Dont a ra d'am repoussi pell demeure e c'hichen,
 Ha da dec'hel diouzön vel pa ven eur vocen.

Ancouët e deus va c'harante qercouly ha va respet;
 Na gant pequement a joa em boa-hi cherisset.
 Senni ra va daoulagad var ar sacrificou
 A eure dei eur galon carguet a c'houlou.

Ancouët e deus ar bromessa hor boa-ni grêt hon daou,
 Fidel an eil d'equile bete fin hon deizio;
 Ancouët e deus al le-ze hor boa-ni prononcet
 En faç an ên, an douar, d'en em garout bepret;

132

Ni voa gant eul le terrubl anganjet hon ene,
Ar c'henta en trahisje punisset e vije.

Va goad am dêv hac am c'hrill dre va oll entraillon,
A deu da vouga va c'halon hac ive va c'homzou;
Mes, va c'halonic tener, mar be ret perissan,
Dirac Doue hac ar bed justiq a c'houlennân,
Ha mar teu e c'halon cris da zelaou va hini,
Me c'houl pardon ouz Doue evidon, eviti.

(63)

Pardon, pardon, va Doue! ma meus oc'h offancet
Dre excès a garante, dre re en em garet.
Dêc'h e tloyemp, va Jesus! ar brassa carante:
Apprezit - ta ho coler, ni offr dêc'h hor bue.
Ha na deut da bermeti e vemp - ni priejou,
Accordit, goude hor maro, ho cloar d' hon eneo.

E c'hes eta, va c'halon, adare da grial
Da recomanq da gaoniou, d'alumi ar tân-goal!
Dre nery da oll effortjou, e clasq soulajamant,
Sivras, ar maro hepquen ell êchui da dourmant.
Autrou Doue, gouscoude, homâ zo calonad!
Ha ni unanet ganêc'h, rancout en em quittât!...

Adieu! adieu, va fried! hano re brecius....
E brononq hep ho cüelet a zo dîn re boannius.
Me reqet dêc'h-hu, Mari, sujet eus va hirvoud,
Yec'het, chamq, ha plijadur, ha graç Doue dreist tout.

An nep en deus composet ar recit truezus,
A zo eur c'hloarec yaouanc zo pell zo maleivus,
Hac en deus e gomposet vit soulaji e boan,
Ha pa deut d'e gana, ho pez sônch anean
Ebars en ho pedennou. En a bedo ive:
Graç demp oll d'en em velet en barados Doue.

(64)

Me reqet dêc'h, tud yaouanc, yec'het, avantur vad:
Doue da bellât ouzoc'h hevelep calonad.
Profitet diouz va exempl, bet furoc'h equedon,
Ha trec'hit en peb amzer peb inclination.

Va c'halon ya da vancout... N'ellân mui prononcîn;
E zân da dremer va glac'har en qeit ha ma vevin.
Mar e meus offancet dey dre va recit amân,
Excus, pardon, Mignonet [?] eo va c'homz divezân.

(Vol. VII, pages 59-64.)
strophes non numérotées.